

KIS-640 – Kudenn al ledañ deskadur

[Notenn e sigur al labour renet gant Reun AN HIR da sevel ul levr war ar c'hefluskerioù]

(YBAN da GE – 11 04 99)

Un notennoù a-zivout labour RAH, *Keflusker dre enleskiñ*. Kentañ penn ez on diaezet. An doare “ledañ deskadurezh” zo skoemp kenan, seul gent a se e brezhoneg pa n'eo ket bet diorreet an hanc'herieg kalvezel ha pa chom pep tra c'hoazh da vezañ graet. Mechal ha ne ve ket spletusoc'h sevel ur meni geriadur gant despizadurioù berr, kentoc'h eget skrivañ en ur ser prederiadennoù ha displegadennoù.

(RAH da GE – 11 05 99)

Daoust d'ar pezh a skriv YBAN a-zivout an “doare ledañ deskadurezh” hag an diouer a c'heriadur kalvezel a-benn skrivañ pennadoù ha levrioù e choman kendrec'het e c'heller ebarzhiñ gerioù nevez e kement diskiblezh 'zo kentoc'h eget o embann en ur “c'heriaoueg sec'h” hag a vo bepred en arvar da vezañ pismiget gant dalc'hiaded gerioù ha troiennoù dispredet hag amresis evel m'eo an degouezh hiziv gant geriaouegi *Diwan* a vez c'hoazh oc'h ober o reuz er skolaj hag el Lise.

Evit a sell ouzhin-me, kroget ganin da zeskiñ ha skrivañ brezhoneg d'an oad a drizek vloaz, gant Santez Marc'harid hag an Ao. Bourdelles, na 'm eus kavet deur er brezhoneg, evit gwir, nemet goude bezañ lennet ar *Sketla*, an *Notennoù*, *Istor ar Bed*, h.a. gant ar Gall René Le Roux ha na gile ket rak skrivañ ken aes ha tra diwar-benn forzh petra e brezhoneg, dres evel en dije graet en ur yezh peurziorreet.

Kement all a lavarfen a-zivout levr Gwenole Bihannig *Douaroniezh Breizh*, daoust dezhañ bezañ chomet hanter hent a-wechoù, pezh na vir ket ouzh an aozer da vezañ sellet a-dreuz gant kelennerion 'zo eus *Diwan*. Hogen, degemeret eo bet an nevezc'herioù gant ar skolidi dre ma oant bet enlakaet en un destenn sklaer ha ma n'eo bet graet en taol-mañ nemet an hanter eus an hent e vo tizhet an hanter all diwezhatoc'h.

Setu perak e talc'han da grediñ e ranker kinnig d'ar studierien testennoù klok ha n'eo ket geriaouegi nemetken — pezh na vir ket e c'hello pennadoù 'zo bezañ adskrivet da c'houde mar bez kavet termenou resisoc'h eget ar re gent, pezh zo c'hoarvezet gant gervaoù SADED ivez !

(YBAN da GE – 20 07 99)

Daoust d'ar pezh a lavar Reun diwar-benn al levrioù enno termenou nevez “ebarzhet” oc'h ober an hanter eus an hent (tizhet e ve an hanter all diwezhatoc'h) e kav din n'eo ket “enlakaat” pe “ebarzhiñ” gerioù zo d'ober, hogen sevel oberennoù kempoell ha klok, ha n'eo ket saeoù harlikin, evel dres levr Gwenole Bihannig¹. Unan a zaou : 1) pe ez eo diorreet ar brezhoneg war an dachenn-mañ tachenn ha dizeur eo adober pe gempenn traoù zo bet graet endeo (pezh en deus Reun lavaret end-eeun da lod, dezho pennoù mouzh) ha kement oberenn a chom hanter hent zo didalvoud, pe 2) n'eo ket diorreet ar brezhoneg ha neuze kentañ tra d'ober zo sevel hanc'herieg an diskiblezh, kuit a gontañ istorioù ha soñjezonou. [...] Mar dalc'h Reun d'e vennoz sevel un destenn doare dornlevr gant rannbennadoù, chabistroù, h.a., e vo arabat dezhañ chom “hanter hent”, en arvar da vezañ distremenet kerkent. Pep tra a rank bezañ malet munut, n'eo ket hepken an hanc'herieg, hogen ivez an doare displegañ a rank bezañ fraezh, diforc'hellek, gouezoniek, hep prederiadennoù n'o deus lec'h ebet en un destenn skiantel.

(GE da RAH – 24 07 99)

[Lizher oc'h ambroug kasadenn an notennoù kalvezel savet gant GC ha YBAN a-zivout ur rann eus levr RAH war ar c'hefluskerioù]

Evel a welit, e tenn evezhiadennoù GC ha YBAN da zaou arvez : an doare ma komprenit ho labour, an doare m'en renit. An arvez-mañ diwezhañ ne emellin ket ennañ, ac'hoel war-eeun : lezel a ran an arbennigourion ez oc'h da emzibab. Ne roin va soñj nemet er par hollek, eleze war an doare ma komprenit ho labour.

Meno GC ha YBAN, hag a-du on ganto, eo ne c'haller ket sevel ul levr a ledañ deskadur a-raok kaout deskadur da ledañ. Al ledañ deskadur a ziskenn adalek al live ma 'z eo klok a-walc'h ar yezh da vezañ yezh tal un diskiblezh betek ul live eeunoc'h e

¹ *Douaroniezh Breizh*, sl. KIS-562, La-11, pp. 401 hh.

gounid tud war o stummadur pe ur c'hevredig stuziet anarbennigour. Hogen al live eeunoc'h ne c'haller diraez nemet dre an hent o tiskenn eus al live klok. Hag ur poent ma pouez start hon c'heneiled warnañ eo hemañ : el live klok hepken e c'hell bezañ ganet ar yezh, an hanc'herieg dreist-holl. Touell e ve krediñ e c'haller genel ar yezh e par eeun al ledañ deskadur. Aon o deus, YBAN pergen a zo ijinour ivez, na zamantfec'h re vuan d'ar par eeun a-raok ma ve dispaket e brezhoneg korf lavar kalvezel diazez an diskiblezhioù. E berr, ne gomprenont ket perak e fell deoc'h sevel ul levr a c'hiz lennegel en ur ebarzhiñ termenoù kalvezel goveliet a-zoug kamm e diouer ur geriadur diazez kempoell ha klok a-walc'h da zisammañ ul leder deskadur a bep emell nevezc'heriañ. Evit an ampoent n'eus ket eus ar geriadur-se : forzh petra a soñjer a-zivout an dudiusoc'h e vez ul levr a stil lennegel eget ur geriadur sec'h, hemañ eo zo da sevel da gentañ, ha dudius e ve pe get. Evel just, hon evezhiadennoù ne dennont ket da gondaoniñ ar mennoz sevel dornlevrioù skol pe destennoù ledañ deskadur, met da stiañ an evezh war ar poent-mañ : oberennoù eus ar seurt ne c'hallor aozañ nemet war ziazez ur yezh kalvezel solut a-walc'h da vont da sol dezho.

Bez' ez eus aze, n'eo ket kudennoù yezhel ha kalvezel hepken, met en don un afer a vuhez pe a varv, eleze a spered. Marvus eo spered serv renerion eil derez *Diwan*, serv pa anavezont da vestr ar galleg goude ma haeront bevañ e brezhoneg — pezh a anvont brezhoneg n'eo nemet galleg masklet — serv dreist-holl pa 'z eo o sujadur d'ar galleg ul lod hepken eus o sujadur d'ar gealiadurezh o ren war ar vuhez foran e Frañs. Reiñ d'ar brezhoneg diazezoù gwirion, klok ha divrall en holl zomanoù zo mont diouzh erlev Roparz HEMON : “Dieubomp ar spered”, zo reiñ lec'h d'ar spered rez. Ar spered rez avat zo dezhañ da amplegadoù, ouzhpenn an diazezoù frank-se hag al labour bras ret d'o amparañ, an distaol eus pep saviad hanter hent — setu dres pezh a rebech YBAN d'ul levr evel hini Gwenole BIHANNIG, ledserv-ledrez, hiron gaonac'h, harlikin difetis a heklevioù d'ar yezh rez evel d'ar yezh serv. Andonioù spered diles zo e Frañs, met don eo aet an troc'h etrezo hag ar speredegzh o ren er mediaoù, en deskadurezh hag en amaezhiezh. Al luskadoù breizhek a zistaol Frañs en o frezeg, nemet e plakont o speredegzh diwar ar pep tavantekañ ha sklavekañ eus ar speredegzh c'hall, en ur zianaout an andonioù spered diles a zo e Frañs, ken ez int div wech tavantek ha div wech sklavek — div wech gall evel a lavared e Breizh, hag er ster gwashañ. Bep ma kasomp hon buhez labour war-raok e teuomp da vuhezañ ar Mouvement breton evel ul livant speg e kostez ar gevredigegzh. Alese an daerijenn a ziskouezomp ouzh kement a chom hanter hent.

An hent erbedet deoc'h gant hon daou geneil a ziskouez bezañ kalz hiroc'h eget an hent hoc'h eus kemeret o stagañ gant ho testenn war ar c'hefluskerioù. “Kentañ tra

d'ober zo sevel hanc'herieg an diskiblezh”, a skriv YBAN, hag anat kaer eo din ivez. An diouer a gendon etrezoc'h ha YBAN e-keñver termenoù 'zo ne denn ket d'ur varregezh vrasoc'h a ve gant an eil pe gant egile war ar yezh pe war an diskiblezh studiet met d'ur c'hemm etre durc'hadurioù : ho pal zo aozañ an destenn resisañ gwellañ dre lakaat da dalvout loazioù beziat ar yezh, pal YBAN zo mont en tu all d'al loazioù beziat etrezek ur yezh n'eus ket anezhi c'hoazh. Pezh a hañval bezañ kevazas en amgant ho levr zo en arvar da vont ankevazas en un amgant ledanoc'h — o tarbenn e vez ar yezh war vont dalc'hmat etrezek amgantoù ledanoc'h. Kemeromp skouer ar poent kentañ eus evezhiadennoù YBAN : *karbedoù emlusket* ; en amgant strizh ho testenn e tiskouez ar rakger *em-* dereout pa voe kinniget er yezh lennegel gant VALLEE, HEMON, h.a. evel kevatal da Et. *auto-*. Hogen, er bed a vremañ e sav kudennoù lemm ouzh lemm en-dro da zurc'hadurioù ster *auto-* ; ematersiñ a zleer hag an *automatisme* dispaket gant ar c'halvezerezh war dachadoù bras eus ar gedvuhez en deus da welout gant an *automatisme* a stader er bevedeg, er bred, en devezout ? Lemmoc'h c'hoazh ar gudenn e brezhoneg : hag an durc'hadur ster kemeret gant *em-* da verkañ frankiz mab den e termenoù evel *emren*, *emouez* a c'hell kenvezañ gant an durc'hadur kontrol, an diouer a frankiz, merket gant termenoù all rakgeriet dre *em-* ivez, evel *emgefreak* ? Pell emamp a vezañ sklaeraet pep tra, rak, mar diwallomp peurliesañ a freuzañ termenoù gwriennet er yezh, e tleomp damantiñ en termenoù a grouomp d'o c'hevazasted diouzh al lavar a vuhezomp ; e se, en degouezh, hon eus kavet mat degas, e-kichen ar rakger *em-*, ar rakger *unan-* ha fiziout ennañ lod eus an durc'hadurioù a oa re *em-* er yezh lennegel ; an degasadenn-se a lak da sevel kudennoù nevez, kudennoù yezh a zo en o don kudennoù buhez, diasur o diskoulm evel diskoulm nep kudenn a'r vuhez : ne ouzomp ket en a-raok da belec'h omp kaset gant ur gemmadenn evel an hini emañ o paouez menegiñ, an arver hepken a roy da c'houzout ha hi vo frouezhus, n'eo ket evit ar yezh, pe gentoc'h ha hi vo frouezhus evit ar yezh dre vezañ frouezhus evit ar spered. E berr, pa savomp un destenn, a dra sur e sellomp ouzh testennoù allyezh, hogen ned eo nepred un droidigezh plaen a reomp, eleze ne stignomp ket a-dal d'ur wiadenn dermennoù allyezh ur wiadenn gevatal a dermennoù brezhonek puñset an holl anezho eus ar geriadurioù, ne reomp ket ur vicher troour hepken : evit aozañ ar wiadenn vrezhonek e rankomp krouiñ danvez yezh war-benn mont leal diouzh pennaenn ar plegañ d'ar stlenn moarvat, met ivez war an amboaz tostaat ar brezhoneg d'ar par ma vo ur wir yezh ha, dreist pep tra, evit seveniñ ul lec'h diles a spered rez. Alese an daou breder a zo re hon labour : anaout mat ken al loazioù bezant er yezhoù kein, ken al loazioù piaouet endeo gant ar brezhoneg, preder troour diziouerus met eilrenk, ha, preder pennañ, kenderc'hañ loazioù brezhonek nevez — ar

c'henderc'hañ-se o vezañ ur vicher all hag ouzhpenn ur vicher pa ampleg durc'hadurioù nad int mui durc'hadurioù eus ar yezh hepken, met durc'hadurioù eus ar vuhez.

(RLN da GE – 02 08 99)

Klevet 'm eus o devez skolioù *Diwan* ur feur uhel a verzh er vachelouriezh. Mat tre. Met lavaromp neuze ez int skolioù gallek a live dereat kenan, arabat lavarout ez eus anezho skolioù brezhonek : pe dregantad eus o ezskolidi a ra gant ar brezhoneg evel yezh labour ? Na PASQUA, nag an Ao. Beskont de VILLIERS, na CHEVENEMENT (na zoken GREMETZ) n'o devez da emchalañ : disol eo o doujañsoù. Evel o holl geveleboù eus ar C'hwec'hkogn avat, ha pa vent foran pe brevez, eo troc'het skolioù *Diwan* diouzh an andonioù krouiñ diles a zo e Frañs. Eno ez eus a dra sur unan eus arbennoù an diaesterioù bras a zo re an deskadurezh c'hall er mare-mañ. Met ha n'eo ket bet aze drama an Trede Republik ? Graet he doa houmañ eus Bro C'hall ur riez skouer a-fet deskadurezh, hogen dre berzh rikladur Frañs el ledistor o deus tennet an andonioù krouiñ diles a oa er vro da heskaat. Ken e welad goude faezhadenn 1940 ar begennoù stuziet o perzhiañ gant entan er Geveleriezh.